

KEVREDIGEZ !

Tòn gant an Otrou Guegan.
zon gant Roc'hlaun.

Me meuz gwe - let a - bred ar min - tin
 man Tre - sek ke - rik koant an ~~Du~~ ~~Kez~~ ~~Kez~~ Pô -
 tred a leiz o tont en eur ga - nan Eun
 dis - kan leun a le - ve - nez.
 O Kolaj Gwen-gamp Skol an dud krenv ha
 reiz Da zonj da vi - ken a vo stard en hon c'hreiz!

Me 'meuz gwelet abred, ar mintin-man,
 Tresek kerik koant an Dukez,
 Pôtred a-leiz o tont en eur ganan
 Eun diskan leun a levenez.

DISKAN.

*O kolaj Gwengamp, skol an dud krenv ha reiz,
 Da zonj da viken a vo stard en hon c'hreiz.*

Tud a bep stad 'meuz gwelet en o zouez ;
 Darn eo roufennet dir o zal
 Gant al labour, an domder hag ar c'houez,
 Hag o daouarn gant troad ar bal.

Darn all freskoc'h n'o deuz evit benvek
Nemet paper skanv ha pluen ;
Ha koulskoude o foan 'zo talvoudek,
En-dro d'ê skuilhont sklerijen.

Eno ive oa beleien zantel,
Ele Doue 'barz ar bed-man,
Ambrougerien an den 'boe m'eo bugel
Beteg 'n e amzer divezan.

Al labourer ankouaet 'n e barkou,
Er chapel a oa daoulinet,
Dirag oter Rouanez an Nenvou,
'Kichen tud a renk enoret.

Ha da Vari diwar o muzellou
Memez peden a darnije,
'Vit ma virje d'eze o c'halonou,
Hag ouz gwaleur m'o diwalje.

Goude pedi e weliz 'nê ouz tol ;
En-dro an dent hag al laten !
Ha setu c'hoarz o sevel 'n eun tol :
'Vel lapoused e oant laouen.

Hag o c'hleviz etrezi o laret :
« Teus ket a zonz, ma mignon ker,
Euz an amzer 'zo, ziwas ! tremenet,
Ma vevemp aman dibreder ? »

Daero gwirion a laouenedigez,
A ruilhe euz o daoulagad,
Rag er vue leun a dristidigez,
Eun envor dous nag a ra vad !